

## KENTSKRID

Pemont notenn a ya d' ober korf an niverenn-mañ. Gouestlet int adarre d'ar brederouriezh, d' ar c'hramadeg, da hanc'herieg ar mor ha da ziskiblezhioù diseurt, en o zouez ar geginouriezh. Gerva ar brederouriezh (ha skiantoù an den), e stumm daou alc'houez, brezhonek-gallek (-alamanek-saoznek) ha gallek-brezhonek zo bodet ennañ termenoù o tont eus LAVAR 10 hag eus LAVAR 15. E dibenn al levrenn evel boaz emañ ar menegvaoù e peder yezh.

Deuet eo poent dodennañ unan eus an doareoù a rannomp gant holl vrezhonegerion hon amzer : al liesyezh-egezh, ent dibarekoc'h an divyezhegezh galleg-brezhoneg. Daoust d'a lavaront, dre emdouell stourmer pe lorc'h hevelebour, an holl a soñj e galleg, ac'hoel keit ma ne vezont ket engwezhiet en un obererezh ma tremen ar yezh gant he c'hefridi reol, mavek, goustreudek. An diac'hinad eo : keit ma chomer e kelc'h bac'h ar yezh evit ar yezh, e harper ouzh ar yezh all, test an aters a zeu diouzhtu dirak ur ger brezhonek na gomprenet ket : petra dalvez e galleg ? Padal, diwar ma 'z eer hebiou d'ar c'helc'h bac'h ha ma lakaer ar yezh en he flas, e tenn an ober e sabr lavarel anezhañ e unan, eleze a-vaez yezh,

ha ster ar gerioù zo e dalc'h an tennderioù etre an oberer ha maez e ober — kantet emañ ar yezh en he roll pourchas danvez da furmiñ izili nevez da gorf an oberer. An ober a ro d'ar gerioù un dalc'h, un tolz, un demerez o virout na dreuzwelfed drezo gerioù ur yezh all : n' int mui klonoù allyezh.

Hon diaraogerion, adalek Gregor, o deus desket dimp sellout hon labour brezhonek evel un ober hag un ober politikel. Politikel er ster gwir eo sevel un dornlevr jedoniezh, ur geriadur a 'r verdeadurezh pe ur studienn brederouriezh. Ken politikel eo ha krouiñ ur vro e-kreiz an dezerzh. Evit annezañ dezerzh lavarel ar brezhoneg eo reizh ma ve amprestet termenoù allyezh, reizh ivez ma ve savet gerioù kevatal d'ar gerioù allyezh, ken reizh all, hag anhepkor, ma tegouezhfed gant gerioù hep kevatal er yezhoù all. Merkomp e tigloras hanc'herioù eus ar seurt-mañ diwezhañ diwar ma vennas obererion dezgeriañ e brezhoneg o damantoù politikel : er bloavezhioù 1900 e voe kentradet an termen *emsav*, ken antroadus ma 'z eo tremenet hiziv e galleg an istorourion hag ar gazetennerion. D' hon tro omp degaset da wiskañ sterioù digent war dermenoù 'zo eus hon damantoù pemdeziek : ha pa ve *nit*, *hontren* en ober prederel, *arbezh*, *divellekaat* en ober gramadegel...

Heuliad na soñjed ket ennañ hag eñ heboell koulskoude eo an emell aozañ er yezhoù all kevatalioù d'an nevezsterioù brezhonek. Arbennet e vez : d' ar c'hallegerion da blediñ gant ar gudenn. Respont a reomp : ar gentañ gallegerion angorzhet eo ni. Gallegerion omp *ivez* ha ne dermomp ket da gas ar galleg war an hentoù digoret dre ar brezhoneg. Eno e kav hon divyezhegezh he staelad politikel. Soñjal e brezhoneg zo krouiñ brezhoneg. Soñjal e galleg zo krouiñ galleg. Bezañ krouet ur saviad kenderc'hañ dre ar brezhoneg hon lak a live gant ar saviad kenderc'hañ dre ar yezhoù all. Obererion lavar omp ha

pell war hon lerc'h e lezomp hon dibourc'h a broviñsiaded plegus d' al lavar graet. Diwar ma soñjer e brezhoneg gant ar vrezhonegerion ez eur e tailh da soñjal e galleg gant ar c'hallegerion, e saozneg gant ar saoznegerion – betek ma teuy Gallaoued ha Saozon da soñjal e brezhoneg gant ar vrezhonegerion (plegenn a voe anezhi n' eus ket keit se). Aze emañ an hent : pourchas lavar ober ha devezout danzeet dre ar brezhoneg ma c'hallo ar pobloù all azasaat dioutañ o lavar.

Alese, er Gerva dibenn evel er Gervaoù kent, an nevez-c'herioù gallek a ginnigomp a-dal da dermenoù brezhonek 'zo en hevelep doare ma talc'homp da ginnig termenoù brezhonek a-dal da dermenoù allyezh 'zo.

Klozomp gant ur *granum salis* : unan ac'hanomp a lakae e oa krouiñ gerioù gallek rentañ servij war un dro d'ar geneiled damantus da virout o brezhoneg e brouti ar galleg. Gwir eo e kilont rak ken eztuat forjadenn ha *divellekaat* da skouer, tra ma vo habaskaet o c'houstiañs pa spurmantint dremm gennevin ar galleg *anasémie* a c'hallint degemer diouzhtu er furn *anasemiezh*.

Guy Étienne